

CHANSON SKEUDEN LUZEL

EN PLOUARET

Breiziz, Breiziz, me meuz o koëlet
Gant joa vraz eun deiz en Plouaret
Deud hoc deuz dreist ar meneziou bras,
Darn all deuz dreist ar morio glas,
Da c'henori Fanchic an Uhel,
Tad koz Kanerrien Breiz-Izel. } (bis)



Goëlet meuz Barzet tud a skiant,
Diredet holl, vanke ket unan,
Deuz Guened, Leon, Kerne, Treguer,
Da guer Plouaret huit ar goël kaer.
Bezân oa tud a bepsori broïo,
A deuz a bepsort guyscamancho. } (bis)



Da Fanchic an Uhel so gred cren
Eur skeuden vraz en creiz ar blassen
Er lec'h mar plije dezan goëchal
Goëled an dud iowank o tansal,
Heno oar eur zijen min kaer, kaer
He man en bronz ar Barzic zeder. } (bis)

Na pebeuz enor da vreiz on bro
Da gavout eur mab douc'h da hano
Da nerz, da skiant a da speret
Da ziskamant kerkoulz da yëhet
Peuz roet deuz bro breiz an avor
Did da virviken gloar ag enor. } (bis)



Meulet vezo da c'hano en gwir
Gand Rolland, ha Jafrenou tal dir
Gand ar Garec, ha kanerrien all
Barz hen Breiz-Izel ag en bro C'hall
Kanet vezo da rismadello
Car bezz manga oar bep muzello. } (bis)



Birviken hëyo gand an avel
Ar pez a peuz gred arok mervel
Rak gand ar paour ag ar pinvidik
Da vrud a zo ed dan Amerik
Ha mim tud Plouaret zo laouen
O cavout he nom zouec'h da skeuden. } (bis)

E. NICOL, Plouaret.



Chanson Gad ar zeiz Sant

Eun deiz c'hiz da redec ar had
Hag he gant paotret ar Houarhat
Da bemp heur nim oa contant
O vonet oar hen ar seiz sant
Ar chass deuz cad eün tam très mad
Barz hen tal kichen ar groas coat.

REFRAIN

Pierre-Marie neuz he lansset
Dao dao N. D. D. chanz fal paotred
A vous. Tra la la tra la la la
la la la la la la.

Poent he dim hasta mont he hent
A peb hini prim de groashent
Me ha buhon me Pierre-Marie
Da groashent ar Guervinihy
Ha me he me paod Gourio
E ha da groashent Kerloho.

Paod Jakett oa scanv mad a droad
Ma c'ha dar red dar groaz coat
A Gouriou a lavare
Aotro Brozec chomet aze
A Nicol neva nec'hamant
A oa ed buhon dar zeiz sant.

Ar chass a zo guel duet mad
Da vonet prim oar lerc'h ar c'had
An holl a gléo mad anezo
O kerzet trezec Kerloho
Ag he benn eun neubeud ama
Vo klevet Gourio o tenna.

Goude n'euz Gouriou tennet,
Ar c'had zalc'h da redec bepred.
A bell er gweler o tremen
Ag huel mad ganti he fenn.
Mez Tort a zo eur c'hi mad
Ag a zalc'h stenn war lerc'h ar had.

An aotro Brozec neuz tennet
Ar c'had zalc'h da redec bepred.
Gant hast he c'hop da c'Hourio :
« Aman vad, paot, a zo bléo. »
A Pierre-Marie oa deud a bell
Pa neoa clévet ar brezell.

Nicol c'haloup dre an hentcho
Peur-zodi ra pa gleo tenno.
Gwelet a neuz en eur dremen
Tort ar c'halvez ag he berc'hen,
Ar reman na hoan ket armet
A gand ar c'had heñt bet ruillet.

Dek tenn a deuz bed ar c'had
Ag e kerz bepred skanv e zroad,
Met Nicol vel ma wél ar c'had,
A zigor frank he zaoulagad.
Dao ! gant eun tenn neuz he ruillet.
Maro eo, deud holl da welet.

DERNIER REFRAIN

Nicol a neuz he lahet,
Hasted buhan dont da wellet.
Rassemblement. Tra la la tra la la la
la la la la la la.

(Réserve)

E. NICOL, Plouaret.